

CHANSON NEVE

VAR SUJET EUN ANTRETIEN ETRE DAOU DEN IAOUANQ

Var eun ton agreapt.

Mar vijen bet studiet vel Calvin pe Luther
Ma fluen ebars ma dorn, diragoun eur paper ;
Me a nem occupje d'ober eur chanson
Din me a d'am mestres pa meuz occasion.

Mes dister hon a speret ha neubel studiet,
Dre natur ber a vemoar hag ep passiautet,
Hag e impossibl din gallout dont da rima
Ma dorn a zo tremblant, na nellan quet scriva.

Bea zo pemp pe c'hoec'h vla boe ma hon commanset
Da roulal ma iaouanquis gant henor a respet,
Da vont d'an assamble gant recreation
Vit clasq eur plac'h iaouanq da c'honit ma c'halon.

Mes en fouar an anaoun vit ar bla tremenet
Dre eur fet imprevu me meuz bet rancontret
Tremen a buod din var vordic an hent bras
A deus he apparision nem za me arretas.

Da gontempli e guenet hag e demarch ker fier
Ebars em oll izeli antreas eun domder
Nem c'halon a c'halumas flamijen an amitie
Hag hep arreti pelloc'h c'havancis e bete.

Evit e zaludi gant pep intansion
O clevet ma fropojo voa joüz he c'halon ;
Hep e nem hanveout na biscoas nem velet
Hec'h antrejomp dustu neur garante barfet.

Tremen a rejom heno diou pe der heur amzer
Pa seljomp tresp an eol evoa eru isel ;
Quen vit en em separi, c'houlis asinasion,
Oh ! ia sur, den yaouanq, en desir o calon.

Lacomp en pemzec devez mar gue d'o fantaisi
Hag e n'em gafem on daou ar sul en Plesidy,
Quement-se zo dam souet mes namancouaet quet
Aben eur pemzec devez peuz din-me prometet.

A dra sur, ma serviger, eno me nem gavo
Nemert Doue a deufe dam guelvel d'ar maro ;
Da bemzec devez goude vel ma moam prometet
Hom en em gavet hon daoulec'h ma moamp assinet.

Voa an eil guech c'hi guelis a c'hi joüz ha fier
An de-ze moa an henor da vont de c'has d'ar guer ;
Ma presenti a rez ha de mam ha de zad
Hag a laran a vouez huel me voa received mad.

Quen nem guitat an de-ze nim nevoa diviset
A fixet an termen vit bean dimezet ;
Quer bras voa hon plijadur, allas na sonjem quet
En conge tad ha mam e voa red dim cavet.

Quen vit nem separi a c'houllas ganin-me
Eur mouchouer godel evit marq amitie ;
Oh ! ia sur, ma mestres, pa he d'ho polonte
Deus a zaou a so ganin c'houi po ar choaz oute.

Deus ma dorn en he hini me neuz bet laqueet
Eur mouchouer godel hag e deuz din prometet
He teuje d'en douguen gant peb fidelite
Vel an temoignach quantan demeuz ma c'harante.

Ober a rejomp eno eun echang mouchouero
Neuz serviget dimp goude vit sehan hou daëro ;
Neuse teuis tresp guer gant eur speret contant
An domder nem isili a ma c'halon tremblant.

O sonjal en devez pehini moamp assinet
Gant conge hon herent vit bean dimezet,
Ar c'houec'hvet a vis guenver, en devez assinet
Me so ed de saludi vel ma moa prometet.

Enem antren bars an ty me meus bet remerquet
E voar bisaj ma mesires penos voa chagrinet
Ma ris var quement-se quer bras reflexion
Quen a sentis eun tortur ho seri ma c'halon.

Hag hep arreti pelloc'h, c'havansis e bete
En eur c'houlen diganti petra voa a neve,
C'houi o neuz poan a gorf pe c'houi neuz poan speret
Demeus ho affliction contet din ar secret.

Ar sujet, ma serviger, deuz ma desolation
Neus serret an or guenta deus joaio hon calon
Dec'h divesan ma serviger me nevoa goulennet
Digant ma zad ha ma mam ma vijen dimezet.

Hag hep dont, da difen ho deuz din respontet
Em c'haven c'hoas iaouankic vit bean dimezet,
Evit se, ma mestres, na nem desolom quet
Gant ho fermission me iello d'ho c'havet.

Ag a deuo d'ho fidi umblamant a galon
Da accordi guenimp ho benedicsion.
Ma mestres a respont din gant peb distincion
A gant eur vouez quen vibrant ma treujas ma c'halon.

Col ho amzer a refet o vonet d'ho c'havet
Me meuz suppliet a voalc'h hep bean obtenet ;
Mes evit n'em assuri demeus a guement-se
Me zo contant a c'hafec'h ho c'hunan ho bete.

E zad demeus ma c'hlevet a neuz din respontet ;
Ma merc'h zo c'hoaz iaouankic vit bean dimezet ;
Mes dalhet da nem henti mar gue d'ho polonte
Me a nevo joa ouzoc'h pa deufet d'ha vale.